

98571

Sonnenneu Bretoned

er MORBIHAN



Tennet get en dastumaden **Dihunamb**
En Oriant

Sudarded ha marteloded men bro

Ag ur pen d'er pen aral a dalben (le front) er brezél ne gleuér konz meit a vuruhedeu er Vretoned. Er Boched ind memb en des skriuèt ar ou gazeteu é ma er Vretoned guellan sudarded Frans. Ne vern é peh bèred é her ar en talben é huélér béieu Bretoned en des reit ou goed eit dihuen Frans, eit dihuen er Spered doh en Nerh...

Er gér, é Breih, er ré goh, er merhed, er vugalé e labour aveit magein er hornadeu aral a Frans n'ou des mui tud. Arlerh er brezél e vo getlet laret é ma er Vretoned en des sovet Frans hoah er huéh-men.

Revedaill é talamb guél eit ma kredemb-ni memb enta, guél eit ne vezè laret. Ia ; ha ret é ma chomemb berpet er péh ma omb, ret é ma hoarnemb er péh e hra d'emb bout tud kaonek, tud gredus, tud dishanval doh en réral. Ret é ma chomemb Bretoned.

Hag eit en dra-sé é ma ret d'emb :

- Konz brehoneg,
- Diskein breton d'er vugalé,
- Diskein lén ha skriu brehoneg,
- Diskein istoér hon tud koh,
- Goarn modeu mal ha guskemant er vro.

Eit sekour genoh chomel guir Vretoned é ma groeit er livrig-men, sudarded. Er soñnenneu e zo abarh e zegaso chonj d'oh ag hou pro'e garet muioh a houdé men doh dispartiet azohti.

Hui hou hañno, a pe gaveet en tu, eit berrat hous amzér hag eit diskoein en des Breih (Bretagne) hor bro-ni ur voéh nen dé ket hanval doh hani er réral... Ha mar da d'er Boched hou kleuet é kañnal, ne grédeint ket tostet d'er touleu léh ma veet ' get eun a vout goasket hoah ur huéh get guellan sudarded Frans...

Ar dalben er brezél, Gouil-Mikél 1916

L. HERRIEU.

AVIZ

(Goulen er soñnenneu-men get en eutru Mellak e Burèu Dihunamb, 54, rue de la Comédie, Lorient).

Grès mat Piér !

(Aveit kerhet)

*Grès mat Piér, galant, galant,
Grès mat Piér, mar d'oh koulant.*

Ketan 'boé choéjet me hani
Oé er filaj én Normandi

Me oeit ha goulnnet geti (*diù huéh*)
Plahig ha diméet oh hui ?

Ha me reskond èl ur verh vat :
Marù é me mam, marù é me zad,

Mès bout ma on énevadéz,
Saùet zo goard d'er vinourer

Ha mar fal d'oh hui me navet,
Konz doh men goard e helleet

— Dématoh hui, tud en ti man,
Kerklous d'er bras èl d'er bihan

Ha d'oh, boulom ,étal en tan :
Men ' man er vinouréz dré man ?

Mar dé er vinouréz ' glasket
D'oh ket deit mat eit hé havet ;

E ma én hé hambr é kousket
Ha hi e lar ne saùou ket

Ha hi e lar ne saùou ket
Ken ne soñnou kloh en Drindet ;

Pe skoei en héaul ar en trezeu
Ma huélou lasein hé boteu

Ma huélou lasein hé boteu
Ha displégin hé seiennou

Eit mont d'en han d'er pardonnieu
Ha de valardé d'er festeu !



Sonnen er Labourér-doar

Ar un ton a « Zihunamb »

I

Nen dont meit ur peurkeh Labou-
[rér

Staget doh lost me arer ;
Tremen e hran rah mem buhé
E poéniein 'dan séleu Doué.

II

Adal er mitin betag en noz,
Nen des na poez na renoz ;
Perpet ér park 'dan en amzér,
Elsé viù er Labourér.

III

Kavein e hran hoah neoah amzér
Aveit mélein me michér ;
Eit diskoein 'é ma er guellan
Ha memb en inouraplan.

IV

Laret d'ein peh michér zou ken kaer
El hun hani mem breder
Karget omb get Mestr en ol dren,
De gampennein é vadeu.

V

Penaus viùehé tud er hériéu,
 Deustou de ol ou madeu,
 Pe né vehé ket Peizanted
 E tastum dehé ou boed ?

VI

Petra e vehé ag en dud sé
 Hag a galz aral gelé
 Pe zehé d'er Peizant dihan
 A hadein bep plé é hran ?

VII

N'hun bechet enta de gaout méh
 Ag hun michér é nep léh :
 Dré zomb e ra en Eutru Doué
 Ou biùans d'é vugalé.

VIII

Red é d'omb poéniein hileih guir á
 Aveit gouni hun buhé,
 Mes ahoel ni e zo digabestr ;
 N'hun bes meit Doué aveit mestr.

IX

Mar réda en huez genomb bamdé,
 Un dé zeï, e guirioné,
 Ma vou keméret pep tapen
 Eit bleuein hun hurunen.

X

Chomamb enta staget, mem breder,
 Bet er marù, doh hun micher,
 Téhamb er hériéu miliget,
 'Men kollér Fé hag iehed.

XI

Ha mar faut d'oh hui gouiet bremen
 Più ' des groeit er sonnen men,
 Neket mesk en duchentiled
 E ma d'oh mont d'er havet ;

XII

Nen det ket d'er hlah eué, m' hou
 [ped
 Mesk en dud vras ha disket :
 Groeit é dré ur heh Labourér
 Eit rein konfort d'é vredér.



Er Chistr Neùé

AR DON : *Margaritig*

I

Peizanted, er gué zou karget
 A avaleu milen
 Golhet hou fustigeu, pautred,
 Er bléad er goulén

II

Lakeit hou fusteu, hou toneu
 De dranpein barh en deur
 Ha paket hou pern avaleu
 Er hornig ag hou lér

III

A pe zeï er gouian kalet,
 Karget hou melinieu
 Ha troeit get plijadur, pautred,
 Malet hou avaleu.

IV

Ha barh er preseu stoubet mat
 Paket hou markajen,
 Lakeit plouz kerh ar bep trohad
 Hou chistr e vou milen.

V

Ha bremen, Bretoned nerhus
Sterdet ar hou preseu ;
Er chistr e vér é frond padus
E garg ol hou krancheu

VI

Petra e dal ' laret hui d'eïn,
Ur banig chistr stanket
A pe vé en dén é tèbreïn
Eit torein er séhed ?

VII

Ha pe vér ér parkeu frankus
E labourat en doar,
Eit lakat er galon nerhus
Er chistr e vou hemb par.

VIII

Ean zou évaj er goaleurus
El hani er pinùik ;
Nen des évaj ken ahehus,
Nen des évaj ken huek :

IX

Ean zou goèd er guir Vretoned,
Hemb zou n' hellant biùein.
Chomamb fidél d'hun Chistr, pau-
[treu,
Mes gouïamb en éveïn !..



MEN DOUS

Aveit kerhet

I

Neket 'n hou ti, tavarnourez
Em es mé choéjet me mestrez ;

II

M'em es hi choéjet tostoh d'eïn :
Ur plah koant ha plijout 'h'ra d'eïn

III

M' hé har, ha hi ne houïa ket :
Chetu er peh 'h'ra poén d'em s'pred

IV

Mechal penaus 'vehè d'eïn mé
Dizol dehi me haranté ?

V

M' hé guèl erhoalh ér pardonieu
Ha d'en noz barh er filajeu

VI

Ha pe za d'eïn gout hé guélein
Men Doué penaus hum zizoleïn.

VII

Mes, allas ! p'hé guélan tostot,
Me bleg me fen ha me huannad

VIII

Troïeu kuh héol, e ha bamdé
G' hé seud de fetan Guirioné.

IX

En dé aral me lak em spred
Monet d'inou eit hé guelet.

X

M' azi ar vordig er fetan,
Get ur boen vras em heh inéan.

XI

En dé sen 'oen chonjet erhat
Dizol dehi me halonad !

XII

Mes a p' hé spian é tonet
Forh fonnus e han de guhet !

XIII

De guhet é han forh fonnus,
Haval doh ur had eunus !

XIV

Ha touchant, skanùik hé guélan
E évet deur ag er fetan.

XV

Hag hé lonned p'hi des deureit
Ar hé goar d'er ger e ma oeit ;

XVI

Nezé, èl ur heh eulanig,
Me hra en dro d'er fetanig,

XVII

Aveit ansé en hé guélet
Ahoel esked men Dous karet...



Sonnen Hélen

Er verh :

Mar fal d'oh hui men diméein,
Ur boulanjér 'gonzet ket d'ein.

Er vam :

Perak enta, Hélen,
Perak enta, me merh,
Perak enta ?

Er verh :

Ur boulanjér e foet é doéz,
Me foetehé mé just ken és !

Er vam :

Guir e laret, Hélen,
Guir e laret, me merh,
Guir e laret !

Mar fal d'oh hui men diméein,
Ag ur bosér 'gonzet ket d'ein ;
(*Er vam* : Perak enta...)

Ur bosér zou kri a galon ;
P'em hemérehé léh ur lon ?
(*Er vam* : Guir e laret...)

Mar fal d'oh hui men diméein,
Un tavarnour 'gonzet ket d'ein ;

Un tavarnour, get é ivaj,
Me lakehé ré de filaj.

Mar fal d'oh hui men diméein,
Ur menuzér 'gonzet ket d'ein ;

Er menuzér get é veniér,
E gas safar é peb amzér.

Mar fal d'oh hui men diméein,
Ur masonér 'gonzet ket d'ein ;

Ur masonér a gér de gér,
Vé 'foetein pri doh er vangoér.

Mar fal d'oh hui men diméein,
Ag ur halùé 'gonzet ket d'ein ;

Get é vohal vras, er halùé
Pen d'er ben és me feutehé.

Mar fal d'oh hui men diméein,
Ur labourér 'gonzet ket d'ein ,

Perpet ér park get labourér,
Aveit ur voéz poénius michér ;

Mar fal d'oh hui men diméein,
Ur hantonér 'gonzet ket d'ein ;

Ur hantonér ar en henteu
A boén ma houni é dam kreu !

Mar fal d'oh hui men diméein,
Ur hemenér 'gonzet ket d'ein ;

Ur hemenér e zou lorbour,
Ha nen dé ket dén a inour.

Mar fal d'oh hui men diméein,
Ag un toér 'gonzet ket d'ein ;

En toér ar en toenneu,
E riskl a dorein é vanpreu.

Mar fal d'oh hui men diméein,
A bautr ur go 'gonzet ket d'ein ;

Mab er go du doh e vegin
E zou ken donjerus a vin !

Mar fal d'oh hui men diméein,
Ur melinér 'gonzet ket d'ein ;

Ur melinér, a di de di,
E voéz ne hra nameit dikri ;

Mar fal d'oh hui men diméein,
Ur guiadér 'gonzet ket d'ein ;

Ur guiadér, é peb amzér,
E zou laer bras ha geuiatér.

Mar fal d'oh hui men diméein,
Ag ur héré 'gonzet ket d'ein ;

Kement kéré e hanaùet
Pen d'er ben e zou maheignet !

Mar fal d'oh hui men diméein,
A vab er markiz konzet d'ein !

Mab er markiz en des argant,
Bout moéz dehon me zou koutant.



Pardon Kelùen

I

A pe oen mein dénig iouank, seitek pé trihuch vlé,
A pe huélen mein me mestrez me halon e hré joé

II

A pe ganné ur huerzennig petremant ur poz kan,
Saillein e hré me halonig èl mamen ur fetan.

III

Hé deulagad glas en hé fen e zou ken lugernus !...
En dén iouank hel ou sellet haneh e zou eurus.

IV

Er hetan gueh'm boé hi guélet, oé é pardon Kelùen
Gronet a vrageriseu zei ar hé goug ur hoalen.

V

Hé hoéfig dantel ar hé fen, doh un in oé haval,
Haval doh un estig bihan ar ur boud e kannal.

VI

Pe oé achiù er gospéreu ha groeit er hetan bal,
Me zihuskas me zok em dorn hi goulen de zausal ?

VII

— Oh ! gieu, oh ! gieu, dénig iouank, get kalz a blijadur
Rahuiz un dén ken karadek n'hellan ket a dra sur.

VIII

Me grog eta en hé dorn guen, d'er horol hi hondu :
Ol deulegad en dud iouank goeh ar nomb a bep tu !

IX

Men dous gorollas ken skanñik ha hi e hounidas,
Un tanterig sei du moaret hag ur rubannen glas

X

Chetu tremenét en anderù hag achiù er horol
Dam ni hun deu d'er gér, men dous, rauk ma kuhei en héol...

XI

Na pegement a blijadur en dé sé m'em es bel.
E tremen dré henteu Kelùen get men dousig karet

XII

Er rañned glazik ér lenneu sonné ur mélodi,
Ur mélodi ken kaer, men dous, òl ne gavér hanni.

XIII

Hag en aùel barh ér gué derù e ganné ken bourus...
Biskoah ! Biskoah ! men dousig koant'n dont ket bet ken eurus...

ER HOLHEREZED

Ar un ton neùé

I

Tosteit bras ha bihan ha pautred ha merhed
Tud bouar, tud dal, tud mud, ol er ré mahagnet
Deit de chileu ur son, em es groeit a neùé
Aveit lakat de ouil er ré e hoarhou ré.

II

Me larou d'oh ur son a neùéso saùet
Ziar ur rumad tud hanùet golherezed ;
Mar faut d'oh gouiet reih e dremen ér vro
Kerhet, pep lun vitin, d'er len d'hobér un dro.

III

Mes ma'hues chet amzer, didrouzet g'hou poteu ?
Me ia de zizol d'oh lod ag en doé réieu
Em es kleuet dilun, étal poulig Kerhùi,
Get merhed me harter, taputerezed guiù !

IV

— Dé mat, komèr Barban, ataù e oh iah mat ;
Hiriù n'hun bou ket poén e sehein hun bugad ?
— Oh ! nann, komèr Vitoér, meit ha téhé goleit,
N'hun bou ket hoah hiriù kalz anoued d'hun treid !

DISKAN

*Malèch ! komérig beur, bourapl é hou tiviz !
Mes érauk mont pelloh, keméramb beb a briz ?*

V

— Ha hui Jaked er Luern, hui hag e gan ken gé,
E karter en Ti-Plouz, petra zou a neùé ?
— Afé ! komér Vitoér, ne houiet ket enta
Timé Ouaned-er Go ne vinour Kernitra ?

VI

— Ich ! Ich ! petra laret, merh er Go e gemér
Ur peurkeh truhégig ðl mab er Guidér ?
Red é laret enta ne gav ket kalz de choéj
Ha hi des euen bras chomel eùé de boéz !

VII

— Truheg ha didruheg, minour er Guiader
E zoug ataù pep sul, goalen ha boutteu ler :
Ê gramaillon, guir è, e zou koh un tamig,
Mes can zoug belouz-viéz kerk'lous èl pep dénig !

VIII

— Ia ! mes can houi èùé skarhein chopinadeu.
Ha p'arriù mèu er gér, rein meur a bahadeu !
— Afé ! komèr Barban, na chetu un doéré !
Rah er hoazed bremen, hui houi'hoalh zou elsé !

IX

Guel d'ein kaout ur goaz, memb un tamig meüer,
Eit kaout ur berlo ha chom perpet er gér :
Ahoel pe vé'n davarn, me hel èùé d'em zro
Péin d'em homerzed guéheu *demi-kamo* !

X

— Hui lar erhoalh, komèr, mes p'ou guélèr bamedé
E arriù lan er gér, e hobér fal vuhé ;
Doh hou pilat lies, èl e hra me hani,
Hui e skuéha fonnus ha glask trokein hoari !

XI

— Pé èl me hani mé hag e ranta perpet,
N'ur douiet par ma hel, er, péh en dé lonket !
Ur spont e vé guélet, plah peur, me liserieu
En dé arlerh en dé lakeit é douladeu !...

XII

— Hues chet kleuet èùé konzal, homèr Barban,
A mab Julian er Fur, ag er Voustoér-Vihan ?
Kleuet em es laret e ma guélet disul,
E tonet ag er Bleu de hel merh en Arhul.

XIII

— Ha Jakedik Guilleu en des prénet d'hé merh,
Ur vrohig « double chaîne » èl hani ur vateh :
Béüenet é neoah get belouz ledannoh
Eit ne zoug d'er goélieu minourzed Kerroh...

XIV

Me iehé hoalh pelloh, mes ré hir e vehé
Laret d'oh rah er péh em es kleuet elsé ;
Mes erhoalh mes laret, mar hues me homprennet
Eit diskoein e vé lies, ré hir téd er merhed !

XV

Pe ne vé ket meit hé, nezen e taputér,
Ar hanen, ar hanont, ar ol tud er harlér !
Er len e saù lies er blagajeu brasan,
E ziskrohen goudé memb er vruden guellan.

XVI

Anséel'ta, merhed, derhel ar hou tèdeu
Ha lesket peb unan de viñein g'é décheu.
Neoah, mar n'hellet ket, hou kunan, dont de ben,
Laret ean d'ein dohtu me hirei me sonnen !...



En tèr seien

I

Bout zou bet un amzér, un amzér treménet,
E karen é karein hag é vezen karet, *latira* (diù huéh)

II

Bremen 'hes un amzér un amzér kontrél d'ein,
Ne hran joé doh hañni, hañni ne hra dohein.

III

Bout zou bet un amzér é tougen tèr seien :
Unan ru, unan glas, en aral e oé guen.

IV

En hani ru 'laken en inour d'er madeu,
En hani glas 'laken en inour d'er bizeu ;

V

En hani glas'laken en inour d'er bizeu,
En hani guen'laken étrézomb-ni hun deu.

VI

Chetu-ni diméet ha chetu-ni koutant
Lakeit d'emb én ur spred d'hobér ur vatimant.

VII

Groeit é er vatimant ha lakeit ar er mor ;
Oeit é d'er broieu pel, pel doh audeu Arvor

VIII

Ne oé ket treménet, treménet hoah ur blé,
Kollet er vatimant, kollet men dén eùé.

IX

Kollet er vatimant, kollet men dén eùé
Kenevou eurusted, kenevou leùiné.

X

Me zer seien bremen n'ou dougein mui jamés
Reit em es ind é prov de chapél er Huerhéz.

XI

Men ma oeit en amzér, en amzér treménet
Ma karen é karein hag é vezen karet ?...

Dastumet ha kaset de ZIHUNAMB get STEVAN ER GAL a Vaud.

Kousk Breih-Izél

I

En hiaul e zou kuhet, chetu achiù en dé ;
Me gleu er hloh é tinsein en Ave.

DISKAN

Kousk, kousk.

Breih-Izél, bro hemb par ;

Chetu en noz é tichen ar en doar

Kousk,

Breih-Izél, bro ker mat ;

Boéh er mor bras e saù d'hou luchennat.

II

Fronn huek er bléad glas hag er benaf é bleu
Get er gloéh noz hum strèu ar er mézeu. (*Diskan*)

III

Er vugulion e son é tastum ou loñned ;
Guerzenneu Breih nen dint ket hoah kollet. (*Diskan*)

IV

Er flagenneu didrouz, me gleu boéh en estig ;
Bamour en noz, kañnet flour ha dousik. (*Diskan*).

V

En néan stéredennus, drest oh, Breih, é splannein,
E lar e hes un Doué doh hou karein. (*Diskan*)

VI

En nemb e huiz bandé e houni é repos ;
Eit en dud vat Doué en des groeit en noz. (*Diskan*)

VII

Arvor, o doar santél, a greiz kalon m'hou kar ;
Nen des bro erbet ker kaer ar en doar. (*Diskan*)

BLEI LANN-VAUS.

SONNEN ER BREHONEG

I

Cheleuet hag é kleueet (*diù hueh*)
Ur soñnen a neüé saüet,
Lonla landerinet
Ur soñnen a neüé saüet,
Lonla landerina

II

Saüet ar Vreih, mem bro karet,
Er vro kaeran e zou ér bed.

III

Benoh de Zoué ma hon gañnet
E Breih, er vor kristén meurbet.

IV

Pe oé men géneu digoret,
E brehoneg em es konzet,

V

E brehoneg em es konzet,
E brehoneg em es pédet.

VI

Pe oen ér lann get me loñned
Na liéset em es soñnet.

VII

Soñnenneu Gal ne laren ket :
Brehonek é soñnen perpet.

VIII

Ha d'en noz, é korn en uéled,
Mam-goh, é tibunein hé ned.

IX

E laré d'emb : « Ho ! dihoallet
A zonet de vout Galleued. »

X

Ho ! Mam-goh peur ne zoujet ket,
Dalimat é veemb Bretoned.

XI

Bet en achimant ag er bed
Er brehoneg e vou konzet

XII

Ha, mé ne laran geu erbet,
Dousoh lavar n'hellér kavet.

XIII

D'er Baraouiz pe vein galùet,
Er brehoneg n'ankoéhein ket ;

XIV

Rak me larou get en Eled
Kañnenneu gaer er Vretoned.

STEVAN K.



Guerzen er stér Ellé

1

Me hanù e zou er stér *Ellé* ;
Gañnet on é lanneu Plouré ;
D'en noz pe vé kloar en amzér,
En Ellé duhont e gleuér. } *bis*

2

Ia, Elled e gañ ar un dro
Barb er hornad-hont ag er Vro,
Hag ou hanù kaer e gemerañ
Rak a zuhont d'er mor é tañ.

3

Oèdet bras é er stér Ellé,
Més hi zou hoah lañ a vuhé ;
Ker koh on él er gér a Is ;
Chonj mat em és a Sant Moris.

4

Moris abad é Langonnet
Épad tregont vlé e zou bet,
Hag arlerh Moris é vredér
E badas ino pél amzér.

5

Guélet em és ur gourén fal
Etré Loeiz-er-Hunff, (Débonnaire)
[roué Bro Gal
Ha Morvan kont bro er Léon ;
Arfleuet e oé ou haloñ. (2)

6

Lahet é bet barh en emgan
Me mignon kaer, er hont Morvan
Oulet en dés men deulagad
A pe goéhas me héh Breihad.

7

Etré Kerné ha bro Guéned
Me verch er vjüen (Limite) eit berpet,
Mes Kerneñad d'er Guénédour
N'é ket red ma vou énebour.

8

Arlerh Prijak ha Langonnet
Me gav ar me hent er Faüet ;
Bep plé a pe arriü en hañ
Me huél pardon Santés Barbañ.

9

Ar me ribl ur gér zou saüet
Ha me hanü hi dés keméret,
Rak a Gemper hag a Ellé
E ma deit er gir Kemperlé.

10

A Gemperlé bet er Pouldu
Léta (1) on, eurus a bep tu ;
Més memb idañ me hanü neüé
Me zou berpet er stér Ellé.

11

Me dremen tost d'en Arhenneu
Kañnet get Brizeg é gnerzeu,
Ha pradeu Guidel e hlubañ
Kent kas men deur d'er mor ledañ.

12

Eit ma torreint nañ ha séhed
Me ra d'en dud deur ha pesked,
Hag ur bern a rodeu mélin
E lakañ de droein bep mitin.

(1) Er gir *Léta* e senefi *joéius*.

(2) En emgan-sé en dés hum hroeit ér blé 818 ar un dorgen galüet
Menez-Morvan, ar ribl déheu en Ellé.



Bro Goh me Zadeu

(Guerzen broadel er Vretoned)



Ni Breihis a galon, karamb hun guir Vro !
Brudet é En Arvor dré er bed tro-dro ;
Hemb eün 'kreiz er brézel, hun tadeu ken mad
E skuillas aveit hi ou goad.

DISKAN

*O Breih Mam-Vro ! me gâr mem Bro.
Tré ma vo mor el mur 'n hé zro,
Rechomet digabestr mem Bro !*

Breih, doar er Sent koh, doar er Varhed,
Ne garan bro erbet kément barh er bed
Peb mañné, pep flangen d'em halon zou kër
Inon 'kousk meur a Vreihad tér !

Er Vretoned e zou tud kalet ha krérv ;
Nen des pobl ken kalonek édan en nérv
Guerz trist, son melkonius e gélid ino,
O ! pégen kaer ous-té, mem Bro !

Mar dé bet pilet Breih ér brézelieu bras
Hé lavar zou berpet ken biù èl biskoah,
Hé halon birùidik e zailh hoah 'n hé hreiz :
Dihunet ous brema, mem Breiz !

TALDIR

(Troet é brehoneg Guened).

Mollet é ti en E. Er Bayon, 67, rue de la Libération, én Oriant,



